




DISMANTROU LANVOAS E HANVEG

Truez, en an' Doue ouz or chapeliou koz o koeza bemdez muih mui en o 'foull.

BLEUN-BRUG

Niv. 116 (Mizieg-Mensuel)
Koumanant - Abonnement : 500 fr.

GENVER-C'HWEVRER 1959

TAOLIT EVEZ MAD

Kasit 500 lur (600 lur kour, a enor — 1.000 lur kour. madoberour) da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Kas ar skridoù da : Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).
Mar fell deoh beza ezel euz ar Bleun-Brug pe rei deom skoazell, kasit ho
skodenn da :

V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.

C. C. P. 544.22 Nantes

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1.000 lur.

TAOLENN

Sarmon an ao. chaloni Ar Menn, person Kastellin, deiz pardon braz ar Folgoad e 1958.	1
Et da laer, gand Mab an Dig	5
Teñzor ar brezoneg beo, gand V. Favé	9
Deil, gand Dreo Koulouarn	10
Delioù maro, gand V. Séité	11
Keleier	12
Avel, gand Yann Gorrigan	17



133865

Sarmon an Aotrou chaloni Ar Menn, person Kastellin, deiz pardon braz ar Folgoad e 1958

AOTROUNEZ ESKIBIEN,
AOTROUNEZ ABADÉ,
VA BREUDEUR HA VA C'HOAREZED KRISTEN,



Setu m'oc'h deut adarre, ken niveruz ha biskoaz, da bardona d'ar Folgoad.
Ha n'eo ket souez kement-se, rag amañ emaoñ eun tammig ar gêr, c'hwi
Leoniz da vihana. Hag an iliz a zo aze, savet gand eun duk euz or Breiz, ijinet
hervez arz ar vro, gand eun den euz or gouenn; benet eul lodenn vraz anezi
er mên braoa a oufed da gaoud tro-war-dro, dezañ ar hreunenn 'finna hag eul
liou glaz euz ar re zounna, liou an trêz moret war on aochou tosta; en iliz-se
gand an tour gwintet diwarni en eun doare ker stard ha ker mistr war-eun-dro,
dezañ liou an aour pa sko heol ar mintin pe an abardaez war ar hinv melen
ledet warnañ; an iliz-se gand he hleier kel ledan o mouez ma seblantont gervel
ar vro a-bez, gand ar halvar en he hostez hag ar 'feunteun en he zal — daou
dra hag a ro blaz d'ar relijion er vro-mañ; an iliz-se a zo evidoh, a dra-zur.
evel hoh eil iliz-parrez, ken aliez m'oh bet enni, ken aliez m'eo bet enni ive,
a-dreuz ar hantvejou, ho tud hag ho tud koz.

Med n'eo ket evid ober eveldo hebken oh deut amañ; n'eo ket kennebeud
evid luskellad n'ouzon ket peseurt huñvre en ho kalonou a Vretoned. Deut oh
ive, a dra-zur, gand hoh ezommou a-vremañ, gand ar goulennoù a zav en ho
sperejou a-vremañ, gand ar fiziañs e hello ar Werhez rei sikour d'an ezommou-
ze ha rei respont d'ar goulennoù-ze.

Emaon o vev a eun amzer hag ar pezh a glask en den enni eo ar blijadur,
ar blijadur roet d'an dra zisterra a zo ennañ, da lavaroud eo, d'ar horv. Ar
romant hag an teatr, ar sinema hag an televizion, ar hamping, an aochou, an
doare d'en em gomperti enno ha warno, ar pezh a lenn ar yaouankiz ha dreist-
oll ar plahed, an oll draou-ze ha ped tra all ouspenn, ne ziskouezont, ne zispa-
kont, ne veulont re aliez nemed plijadureziou skañv pe hudur, kement a hell
rei tro da zirolla ar sperejou, da vreina ar halonou, ha padal da vralla diazezoù
ar familh.

Setu r bed a hirio ! N'eo ket 'ta ! Ha dirag eur seurt bed ennañ kement a
vouilhenn, a 'fank, a hudurnez, an iliz a ziskouez deom ar Werhez e gloar ar
Baradoz gand he horv. Hag en eur ober kement-se e tigas da zoñj d'ar hristen,
dirollét siwaz evel ar re all, e tle ar horv plega da lezenn ar spered hag eo
dre ma soublo d'al lezenn-ze eo e hello, eun deiz ive, evel ar Werhez, kaoud
er Baradoz eur vuhez all enni eun eurusted gwirion ha ne hell ket beza
tostaet, pell ahano, gand ar fals-plijadureziou treñk a gav e lagenn ar bed-mañ.
Ar vaouez benniget dreist an oll gwragez ha na oufed goapaad he glanded heb
ofañsi Doue, ar plah yaouank hag a en em ziskoueze e Lourd da Vernadett,
en eur lavared ez oa ar Werhez kofisevet dinamm, ar vaouez kaer dreist an
oll verhed hag a zo bremañ he 'flas e barr an neñvou, a zo evidom eur gentel
veo hag a zigas da zoñj d'ar gristenien eo war ar burete, ha war ar burete
hebken eo e hell bleunia ar garantez wirion, an hini a ra yaouankizou yah ha
familhou kreñv.

Emaon o vev a eun amzer hag a ro tro d'an den da veza lorhuz hag
e gwirionez leh e-neus d'her beza, dre ma kresk bemdez e halloud war ar bed,
war an traon, war ar vuhez zoken. Dre e skiant, e ouiziegez, e ro lamm d'ar
hleñved, e astenn hirder ar vuhez, e furch e diabarzh spered ha koustiañs e

vreudeur, e taol e zellou pelloh pella e dounded an oabl steredennet, hag e tosta ar poent ma hello kas listri a beb seurt beteg al loar hag ar stered maro, ha mond marteze da jom di. Ouspenn-se, dre an ezamant a zo muioh-mui d'an oll, dre ar mekanikou ijinet gantañ evid labour an ti koulz ha labour an dianvez — hag a ro o gwalh d'e oll c'hoantegeziou, dre ar zikourioù ingalet evid ar bevañs, ar gwiskamant, al lojeiz, an deskadurez, setu ma kav dezañ e vo tañvaet eun dervez war an tamm-douar-mañ eun eurusted leun heb ma ve ezomm da gredi en eur baradoz en tu-all.

Va breudeur ha va hoarezed kristen, ni beleien, n'emaom ket euz ar re hag a gustum mouza dirag ar « *Progrès* », dirag an oll gwellaennou digaset deom gand ijin mab-den. Er hontrol eo : mall on-eus da weled deut an amzer ma hello al labourer diwar ar mēz, koulz hag hini kēr, gounid e vara heb terri e gorv ; ma hello dreist-oll gwreg ar houer chom er gēr evel ar gwraez all evid kempenn he zi ha soursial ouz he bugale — ha gand an dra-ze he-defe awalh da ober, n'eo ket 'ta, tudou ?

Evelato, va breudeur ha va hoarezed kristen, daoust da ze, daoust d'ar cheñchamantichou euruz digaset dre-oll, daoust d'an trakteur, d'ar vedérez-dournérez, d'an oto ha d'ar harr-nij, d'ar radio, d'an televizion ha d'ar sinema, d'ar mekanikou da walhi, da skuba, da bura ha da goara, ha petra all c'hoaz, ... al levenez leun, digoumoul, peurbaduz, an den n'he havo ket er bed-mañ, n'eus forz petra a hellfe c'hoaz ijina. Ar maro a deuio atao, hag ar boan-spered ive. An Norvej, ar Sued hag an Amerik hag a zo broiou e penn-araog evid an ezamant, a zo ive siwaz ar re a zo da genta hag a-bell evid an dud a en em zistruj.

Al levenez leun, an eurusted gwirion evid an ene ha zoken evid ar horv ne vo kavet nemed er Baradoz gand m'or-bezo er bed-mañ heuliet roudenn an Avel, gand m'or-bezo lezet gras an Aotrou Doue d'on heñcha.

Evel ar Werhez Vari, eur vaouez euz ar memez gwad hag ar memez kigen ganeom — eet dreist da halloud an den o veza m'eo bet koñsevet heb pehed, o veza ma 'z eo mamm da Zoue — hag a zo bet koulskoude e-doug he buhez eur vaouez evel ar re all, hag he-deus labourer evel ar re all, en ti ha war dro ar gēr ; ya, med hag he-deus, avad, dre garantez evid Doue, digemeret a galon vad an oll darvoudou euruz pe gwall-euruz a errue ganti, hag he-deus gouezet en em ankounac'haad heh-unan evid beza da Zoue ha d'ar re all, ha n'he-deus kemeret soursi ganti heh-unan nemed dre ma ouie e servijfe kement-se da Zoue ha d'ar re all.

Ha setu alhwez an eurusted er bed all ha zoken er bed-mañ.

Emaon o veva en eun amzer ha ne gont mui enni an den en e bart e-unan, o veza ma 'z eo evel pa lavarfen *kordennet ouz ar re all*. A zo mad a-dra-zur, rag en eur bed didruez evel an hini ma vevom, eo red en em unani. Ya ! gand ma ne deuio ket an den mab da Zoue, breur d'Or Zalver, da veza evel eun aneval en eur vandenn jatal, evel eur rod pe eun ibil en eur mekanik. Rag an den e-neus evelato eur spered dezañ ha dezañ hebken, eur volontez dezañ ha dezañ hebken, eur galon dezañ ha dezañ hebken, eun ene dezañ ha dezañ hebken, hag an ene-se a rank da zavetei eñ hag eñ hebken.

Hogen muioh-mui, dreist-oll e broiou a zo, hag a anavezit, ar houarnamant a daol muioh-mui e graban war koustiañs an dud, war o ene, war o spered zoken dre ar skol ha n'eus nemeti, dre ar *parti* ha n'eus nemetañ, dre ar journalioù, ar radio, an televizion, dezo ar memez liou, dre al leorion, enno ar memez mennoziou, dre ar polis prest atao da ziskuilh, dre ar prizon digor braz e zor d'ar re ha na 'fell ket dezo bale war ar roudenn merket gand ar vistri pe gand mestr braz ar vro.

D'eur bed hag a ya, siwaz, re war an tu-ze, d'ar gristenien diantket hag a zell re ouz ar broiou-ze, touellet ma 'z int gand an traou braz greet enno, an

Iliz a zigas da zañ d'an den ez eo bet krouet libr hag e tle chom libr. Hag evid-se, e tiskouez deom ar Werhez Vari, libr dirag an dud ha libr dirag Doue zoken. Rag Doue n'eo ket bet en he heñver eur mestr absolu. Pa 'z a euz e berz an Arhael da gaoud ar Werhez, n'eo ket eun urz eo a gas dezi, met eur gemmenadurez. Kinnig a ra da Vari beza mamm d'E Vab ma plij ganti. Libr eo da asanti, libr da nah. Ar Werhez a asantas med goude beza goulennet penaoz hellfe seurt tra erruod, o veza m'he-doa prometet chom gwerhez. Ar Werhez a respontas ya, hag Or Zalver a oe roet d'ar bed.

Emaon o veva en eun amzer hag a welom enni ar broiou nebeud ha nebeud o tigeri an dreven a vire ouz an dud dianvez, ouz an estren da zond enno. E-leh beva e diabarz o harzou evel gwechall, setu ma welom anezo o klask en em unani. Pennou braz ar broiou a en em vod a vare da vare, evid klask en em entent diwar-benn o ezommou, o diézamantichou, evid klask an tu d'en em gompren, d'en em zikour. Ha n'eo ket hebken ar pennou braz a ra kement-se. Ar re ahanoh a oa amañ er Folgoad, daouezeg dervez a zo, hag o-deus gwelet yaouankizou « *Pax Christi* » oh en em voda du-hont dirag an iliz a ganchou, deut euz pevar horn an Europ, ha euz a belloh zoken, goude beza bet greet e-pad deg dervez eur pennad-hent hir asamblez, Fransizien, Allmanted, Spagnoled, Beljed, Hollandiz..., tud du, tud melen, tud gwenn, mesk-mesk ha dourn-hadourn, o-deus bet a-dra-zur eun testen beo euz ar pezh a lavaran. Hag an digemer dreist ha kaloneg greet dezo er familhou, ar strakadennou daouarn a zave dre ma tremenent, an daelou a leunie an daoulagad pa vezent gwelet o vond skuiz maro ha goloet a bouldrenn, med en o zell, avad, eun elfenn a lorch da helloud, abarz ar fin, diskouez ez oant oll breudeur daoust da liou o hrohenh ha d'ar yez o gomzent : kement-se a zikoueze frēz hag anat ez eus hiviziken e kalonou ar gristenien eur c'hoant, eur youl, eur volontez, eun ezomm da deurel e stal a gostez ar pezh a hell on dispartia ha da zerehl ar pezh a hell on unani.

Hogen, *petra hell on unani* ? Da genta, ar gredenn ez om bugale ar memez Tad, on-eus ar memez Breur. Or Zalver Jezuz-Krist, med ive, a gav din, ar gredenn sanket ken doun all er halonou ez om bugale ar memez Mamm.

O klevet pelerined « *Pax Christi* » o kana an « *Ave Maria* » en eur erroud er bourkou hag ouz hel lavared e nousped yez dirag ar mikro war blasenn Lesneven, e soñjen evelhen. Ya, ma karfe an oll gatoliked a zo er bed lakaad da dalvezoud en o buhez hag en dro dezo ar wirionez-mañ ez eo Mari o mamm, o mamm dezo a-dra-zur, mamm o bro ive a zo sur, med dreist-oll, araog peb tra, dreist peb tra, mamm an oll gristenien, mamm an oll broiou, mamm an oll dud ingalet war gorre an douar ; neuze e ve cheñchet meur a dra er sperejou, er halonou, hag en doare d'en em gomporti e-keñver an dud n'int ket euz or gouenn, nag euz or hostezenn, peogwir ez eus eun dra hag a hell or boda : ar memez karantez evid ar memez Mamm.

Ha seul êsoh e ve ober kement-se, dre ma 'z eo anavezet ha karet ar Werhez Vari ouspenn ganeom ni katoliked : zoken gand protestanted a zo, ha dreist-oll gand an ortodoxed, Russed hag all, e vez pedet ar Werhez. Ar vuzulmaned a anavez anezi ; ar bayaned zoken a zigemer he skeudenn en o locheni araog anaoud Or Zalver. Ha tud or bro kollet ganto o feiz a ro o zi evid he fedi araog ar mision — heb na 'z afent evelato d'ar mision.

Evelse eta, en eur zañjal er Werhez hag en eur bedi anezi, ar gristenien en em vod muioh-mui kenetrezo, hag a dosta ive muioh-mui ouz ar re n'o-deus ket ar memez relijion ganto.

Emaom o veva en eun amzer hag a welom enni evid ar wech kenta galloud an den savet ken uhel ma 'z eo gouest da zigas fin ar bed ha da gas da get

kement a vev war an douar. Euz an eil mare d'egile, fuzé ha bombchou a beb seurt, enno nerz an atom, a hell plava ha koueza warnom.

Hogen morse, abaoe ma 'z eur kristenien war an douar, n'eo bet ken enoret ar Werhez gand an Iliz. « Mari konsevet heb pehed », « Mari douget d'an Neñv », setu artikloul roet da gredi gand an Iliz. Morse n'eo bet an dud fidel ken douget d'en em erbedi outi ; morse n'eus bet kement a virakloul dre de galloud ; morse n'eo bet en em ziskouezet ken aliez hag abaoe kant vloaz. Ha beb tro e teu ganti ar memez alioul, ar memez kemennadurez, ar memez promesaoul, med ive, ar memez gourdrourzoul, en hevelebe doare ma 'z eus tud hag a ya beteg lared ema ar Werhez o prepari eil donedigez Or Zalver, hini ar Varn jeneral.

Va breudeur ha va hoarezed kristen, arabad deom beza euz niver an dud-se hag a wel e du an amzer da zond. Kredom kentoh e fell d'ar Werhez prepari an dud a vremañ, ar bed a vremañ d'en em rei d'he Mab, evel m'he-deus prepret he Mab d'en em rei d'ar bed-koz.

Ha penaoz en em rei d'he Mab, da Jezuz ?

N'on-eus evid-se nemed lavared « ya » dezañ, evel m'he-deus-hi lavaret « ya » d'an Ael, ha dre an Ael, da Zoue. Ha lavared ya da Jezuz, a zo'chom unanet gantañ dre ar bedenn, diouz ar mintin ha diouz an noz, dre or spered hag or halon savet war-zu ennañ e-doug an deiz, dre ar gomunion resevet aliez. Lavared ya da Jezuz, a zo digemeret al labour pemdezieg a zigas deom atao an hevelebe poan hag-an hevelebe skuizder, en eur zoñjal e-neus al labour-ze talvoudegez eur bedenn pa 'z eo kinniget da Zoue.

Lavared ya da Jezuz a zo digemeret ar boan, poanioul, a gorr, a spered, a galon a zailh ken aliez ha ker stank warnom, a-zo unani ar poanioul-ze gand re Or Zalver evid on ene hag an eneoul.

Ha kement-se a zo pedi hag ober pinijenn : end-eeun ar peza 'houlenne ar Werhez e Lourd.

Lavared ya da Jezuz a zo lakaad an Aviel da dalvezout en or buhez, en or familh, en or micher, en dro deom, n'eus forz petra a rafem, e peleh e vem, peseurt mod buhez a ve on hini.

Hag evelse or-bezo sentet ouz ar Werhez ha sikouret anezi, eun nebeudig, a-dra-zur, med sikouret evelato da lakaad ar bed nevez d'en em rei da Jezuz.



R	E	D	A	D	E	N	N
I		I	Z	E	L		A
S	T		O	H		D	O
K	A	R			Y	E	N
L	O	A			A	V	E
E	L		T	R		I	G
N		R	O	U	E		E
N	A	O	N	E	D	I	Z

GERIOU - KROAZ

Diskoulm da gudenn an niv. 114

ÉT DA LAER

gand Mab an Dig.

I. — Ar banne burzuduz.

— Job ! Job ! En taol-mañ eo grêt ganin ! Krog eo ennoun, ar hagn 'fall, Job, e va 'bouzelloul ! Devi a reont, a daolioul, evel ma ve merien o kregi enno. Nag a storlok er roniell-gar ! Hop ! Dipadapa d'ar red-tan ! A-veh ma 'z eus amzer da zilañsa... soubenn ar hignon !

— Va 'faour-kêz Biel, me ive a zo krog ennoun Mari-Gerzbuan ! A-veh ma hellan tenna va alan ! Me a gav din eo rinklet er-mêz ouzpenn an hanter euz va diabarz. Emaom o vond diouti. Re gal ! Sell adarre, eur barr-arne.

D'an daoulamm, berr warnañ, e kerzas ar paour-kêz Job.

Eur foz a oa bet toulllet war ribl ar ster, eun tamm plankenn da lakaad an treid. Eno deiz ha noz ouzpenn eur hant a winte o hleier.

Gér ebed ! Fuzulioul a oa e-hichen. Deh e oe lazet unan ; eun all a oa kouezet badinelllet en toull ; unan muioh da gas d'ar vered ; bemdez e veze leun ar harr.

Job ha me on-oa grêt beteg-henn euz or gwella evid herzel. Gelllet on-oa prena bara ha patatez.

Rag al laou on-oa aon. Diredet oant euz a bevar horn ar bed... p'o-doa klevet e oa kig e-leiz da zuna, ha war o hein e tougent an oll gleñvejou speguz. « Deom da gousked er chapel, eme Job. Ni 'ziwallo ar halurioul. Arabad kolo : kouskom peb hini war e blankenn. Gwelloh eo kaotid rioul eged laou ! »

Eun deiz e oem spontet e-kreiz or housk. An nor a oe dibradet, strinket en diabarz. Ni a lammas evel chas war an divroad. « Er-mêz ahalen, eme dezañ Job, pe ni a dorro dit da benn. » Hag ez eas d'ar red kuit. An tennoul a strakas. D'ar beure e oe kavet stag ouz skourr eur wezenn. Et oa d'en em groupa. « Marteze, eme Job, oa deut amañ da bedi. Pioul oar ? Arabad dit ober biloul. N'edo ket mad e benn. »

A-nebeudoul e kalede or halonoul. Eun tammig poan a ra vad, evel ar glaotia-denn da graza eun tamm bara. Re a boan a zev, a zuilh beteg an diabarz. A ! or halonoul yaouank, or halonoul drant, leun a zirlink, or halonoul bugale, heskinet a daolioul mein, a daolioul kleze. Ne oant nemed minvig or halonigoul. Ar peza on-eus diwasket, añ naon, ar zehed, an drubardèrez dreist-oll hag ar yudazèrez o-deus lakeet warno eur gwiskad kreun kaled. Kreun kaled pe evel war-benn ar vugale, eur gwiskad togenn-druez.

— Pouah ! eme Job o tizrei. Ma vije amañ da vihanna delioul kaol ! Na kaol, na paper, na dour d'en em walhi. Ma vije da eva ! Sehed ! Sehed am-eus, Biel, sehed ha terzienn. Emaom o neza on neudenn ziweza. Skriv d'am zud, Biel, ma varvan.

— Alo, Job ! Alato ! Ne vim ket sammët e-giz-se.

— A gav dit ! Hirio an dra-mañ, warhoaz an dra-hont. En eur gestenn emaoim. Ar re na varvint ket gand an raon, ar hleñved, ar vizer a vo mouget.

— Job ! va 'faotr-me ! En da zav ! Deus ganin !



Ar gwad tomm a verve en or gwazied. Krena reem war on divesker. Ar gwentri ol lakee da skignad on dent.

— Diskarg heb a vanne elixir deom-ni.

Hag e sentas ar paotr gwisket e gwenn.

— An dra-ze hebken. Beb a werennad. C'hwil a zo greet ganeoh.

Med o weled o para on daoulagad du e sentas adarre.
Hag hop ! Er-mêz e-tal an nor, me gouezas evel ma m-bije paket eun taol
horz houarn war gern va fenn, badinell et mik.



« Job ! Job ! » Ar gwad e-noa lahezet e benn. En eur goueza e-noa stoket
ouz eur bodez toull a oa er horn tro. « Job ! Job ! » Né hellen ket e zivorfila.
Goude beza greet dezañ eun heja, e tigoras eul lagad.

— Re gal ! emezañ. N'oun ket maro.

Ep eul lamm edo en e zav, e sellas war e dro, e kroazias e zivreh.

— E peleh oun-me bet ? emezañ. Pare ? Med n'oun mui heñvel. Eur gwad
imoret, fuloret, a voud ennoun. Va hroheñ ! Va hroheñ ! Kér e kousto deoh,
paotred. Beva rin.

Hag e serras e zaou zorn, o zroas, evel ma vije gand eur wialenn o klask
dour, hag e youhas :

— Da laer ! Da laer ! Deom da laer, Biel !

II. — Touristed.

— Ni ho kas d'an Almagn eur pennadig. N'eo ket evid labourad, med evid
diskouez deoh ar vro. C'hwi a welo pegen kaer eo ! Nag eo enni eüruz an dud !
C'hwi a garo ar vro-ze. Enni e vevoh eüruz ha c'hwi a zizroio d'ar gêr en eur
gana he meuleudi, eme deom eur hanfart a zen, arhant war e skoaziou hag
en hinou.

— Pell zo oun dizonet ha ne gredan ket er strobinnellou. Touristed ! Biel !
Touristed ! Deom da weled !

— Raoust ! Hanter-kant e peb bagon, hag afo ! » Prennet an nor.

— Emaom kraouiet, Job !

— Ya, ha n'eo ket evid larda ! Arabad ober bilou ! Gwelet e vo.

Beb pemp pe c'hweh eur e veze digoret deom. A-veh ma ne veze ket sutet
deom, evel d'ar mirhier e Gwitalmeze. Eur wech Job a zirollas da hoarzin.

— Ar mër koz, Biel, e va hêr-me, a gase bemdez d'an ampoent e gi da
gichenn eun torgoz ! Eur pardaez e torras e zugell hag e lammaz d'ar yer.
Maz-pije gwelet !

Job a hoarze.

— Schnell !

Sakramant ! Dir o lugerni harp er feskennoù. « D'ho log, touristed ! »



Tri dervez ! Teir novez ! C'hwez ar fank. Tud klañv oh ober diouz an daou
benn. Kelienn du a re velen. Daoulagad disloñket. Tud a ouela, re all o klemm
gand ar boan.

— Nag a draou burzuduz o-deus kavet on tud desket ! Job ! Ar peoh, an
eürusted er bed oll ! Nà pegen kaer ar vuhez, Job !

— Touristed ! Touristed ! a hrosmolas. E zent a skrije. Eonenn a oa war
e weuziou (1). An donjer, ar gasoni a voude e strad e galon.



Taolennou drant or yaouankiz ! Da bardaeziou alaouret an hañv, eur verhig
koant, Janig pe Rozig or galve :

— Dond a rez ganen da gas ar zaout d'an dour ?

(1) Muzellou.

Ar zaout en em gleve ablamour, douetuz braz, ma welent oh en em glevet
kenkoulz, an daouig o rene. O amzer a gemerent da beuri er strêd voan, ha ni
on hini evid azeza eur pennadig en eur gichenn. Eur hrilh a gane. Ni her
zelaoue, hag ouz he zelaou e chomem souezet o klevet eur han all, burzuduz,
dudiuz evel hiboud ar mor, o sevel euz a strad or halon.

An dour a zirlinke er houeren, dour sklêr ha didan or bro deom-ni. Ni a
denne or botou, ol loerou, hag a lamme enni d'ober bourboulh. Me a lakee va
dorn gleb d'ober illig d'he chouk. Hag e hoarze.

— O ! etun nadoz-êr ! Pak din eun nadoz-êr !

Hag eh azeze war eur mên e kreiz ar froud, he bleo melen o lintra e-pad
ma reden er 'foenneg, el lehid, war-lerh an nadoz-êr a blañve harp ennoun, a
nije pelloh evel oh ober goap euz ar chaseour kropet. P'am-beze he faket, nag
a fouge e va dousig ! Hag ennoun-me 'ta !



D'an dour ! Job ha me a oa kaset d'an dour gand fuzulioù.

Ar moh en or bro a vez gwalhet beb an amzer. Gwihal a reont, med pegen
koant a vezont da houde ! O reün a lugern evel seiz. Me m'eus anavezet unan
— eur plah yaouank koz — hag a ranke pokad da beb penn-moh he-deveze
gwalhet ! Ha tud karantezuz evelse ne gavont pried ebet ! Eun druez eo !

Med ar moh e neb bro ne vezont direunet nemed eun dro, pa vezont maro.

E-leh ni, Job ha me, paour-kêz tudou ! m'ho-pije gwelet ! An douzêrez a
dremenaz e peb leh... ya e peb leh, gand heh aotenn skrijuz ha ne lezas ket
ganeom eur vlevenn !

Eur penn touz a zo farsuz e weled. Penn a-dreñv devet eun targaz, pegen
divalo ! Eur hihog dibleunvet, ar yer o-deus donjer outañ ! Ni, ni, melfed
kollet ganto o hroheñ ! Biskoaz n'on-de kredet e vem bet lakeet ken izel.
Biken n'on-de greet an dra-ze na d'or hi na d'or haz ! Ha m'on-dije gwelet eun
den o klask henn ober d'eun all, on-dije torret dezañ e benn gand eur strapenn.

Touristed, touristed ! eme Job etre e zent. Sklavourien o vond d'an ivern !



Ni a gavas en eur bern loudouriaj beb a voest merglet, hag ennañ e oa
lakeet deom, goude diou eur o hedat, beb a loaiaid yod patatez. On dilhad a oa
bed dilaouet en dommder. Leiz kenañ e oant ha ni a grene enno. Ni a yeas
da glask eur horn-iro e-touez ar holo en eul lab. Tennet oa bet diganeom peb
tra, dreist-oll ar hontilli, peb benveg a helle troha.

— Va hontell a zo chomet ganin, eme Job, hag eun aotenn a zo enni. Gwell
ha n'eus erru den. »

En eul lamm edo en eur gambr hag e taole dreist ar voger pallennou.

— Hag ar re all, emezañ en eur youhal. Klev, Biel, a daolioù kontell ez an
dezo. Ha gagnou, gagnou ! An tan en ho pro lor !

Ni a reas buan beb a zê hloan gand pallennou trohet ha neud orjal. Ha dao
d'en em astenn.



An noz a oa sioul. Dre eur prenestig e lugerne eur steredenn. N'oam ket
evid kousked, ha koulskoude oam skuiz maro.

— Biel, nag oa kaer ar vuhez ! Sofij am-eus : d'ar zul goude lein, paotred
yaouank ar gêriadenn a gemere o hezeg. War gein d'an daoulammou ni a gerze.
Elfennou tan a strinke a beb tu diouz an hern. Dour, pri a strinke ive a-
wechou. Ar merhed koz d'ar pilpazig a glask en em zavetei e toull eur hê. Hag
e hrosmolent hag eh egarent.

« Lamponed fall ! Ailhoned ! »

Ar merhed yaouank, evel eun torrad yér, a droe, a lakee da nijal o bleo du pe hell, o zavañcherou marellet, a youhe, a hoarze oh en em zastum kazell ha kazell dindan skourrou lann.

Ar vein-pave er bourk a dregerne hag euz eun dorgenn d'eben, sounn or penn, digor or bruched d'an avel, ni a nije, or gwad o lammad, an tan en or gwazied.

A-benn-err ez eom er mor en eur zaoulammad. Sevel a ree ar gwagennoù. Ar hezeg a hourriche. Ni a zalhe stard d'ar siblennoù. A-wechou eun houlenn direiz a gave an tu d'on dibrada diwar or marh. Nag a ebat neuze ! Sevel a reem en-dro. Hag an dour o tivera diouzom, hag euz or hezeg, ez eem adarre evel mezvet gand an tiz, an avel-yor, avel ar frankiz, da lammad dreist an ter-gier, da lakaad da zutal an askol hag ar bizin o seha.

« Me 'm-oa aon ouz da weled deh, a lavare din Soazig d'al lun vintin. Arabad eo dit mond ken buan nag ober kement da vrachin. »

Med en he daoulagad glaz e welen nag he-doa kavet kaer he dousig.

Ha gér ebed ken.

— Job, kousket out ?

Grik.

E-kreiz an noz e oan dihunet goude beza en em skrabet beteg ar gwad.

Al laou, a vandennadou, evel ar merien er gwaremmiou o-doa sailhet warnom. Goloet oam ganto. Difourcha a reent a beb korn, hag edont warnom evel ar preñved war eun tamm kig o vreina.

— Te a ouie, Job, ez eus daou rumm laou, laou ar penn, ha laou ar horv.

— Sell, me a laka houmañ war va 'fenn.

D'ar red, evel eun itron o vond d'ar marhad e tizroe d'he douar-leve hag e sanke ennañ e firhier, evel ar re all.

Touristed, touristed !

(Da genderhel.)

Evid ho peajou :

kirri-nij, bagou, treniou, otokirri

Ti ARMOR-VOYAGES a vo laouen o sikour an oll gevredige-ziou, strolladou, kelhioù en o oll veajou, e Bro-Hall hag en estrenvro, da geñver ar hendalhiou, pelerinachou, bodadegoù a beb seurt, hag en oll veajou a vez greet e-pad ar vakañsou. Feurmi a ra kampreier ha prejou evid an ostizien o veaji en o otoiou. Feurmi a ra ive ar plasou e teatrou ha salioù-sinema Pariz. Goulennit ali ARMOR-VOYAGES a-barz aoza n'eus forz peseurt beaj.

Agence ARMOR-VOYAGES, 4 bis, rue Colbert, BREST.

Tél. 44.24.62 (Licence N° 32). Direction : Yves LE LOUZ.

TENZOR AR BREZONEG BEO

50. Brennigennou.

« Digor braz gantañ e vrennigennou » (Kleder) = e zaoulagad. E galleg e kaver ivez ar gér « *bernicle* » evid lavaret « patelle » med Danzat a skriv « mot de l'Ouest emprunté au breton « *bernic* ».

51. Breser.

= dibasiant e Leon. « *Pebez breser ! Kemer da amzer !* »

52. Bri (ar vri).

= an tevenn war ribl ar mor (Plouneour-Trez).

53. Bribouilh.

Ano-gwan hag ano : eur bugel atao fich-fich. (Kerlann Tregon 1941.)

54. Bronn.

« *Ober bronn d'ar varr* » = faire des pauses appuyé sur le manche de la houe ; travailler sans ardeur. (St-Vig, Peronn 1942). « *Ober* » amañ a dalv evid *rei*. An implij-se e-neus ar gér « ober » e meur a garter euz Bro Gerne. E Leon e vez lavaret ive « *rei bronn d'ar bal* ». Pa vezer o tiskuiza a greiz marrad pe balad e vez harpet ar vruched ouz beg troad ar varr pe ar bal.

Bronnig-laed (laez) greet e gomm, a vez lakeet d'ar bugel e penn e voutailhig laez. (Kerlann, Tregon 1941).

55. Brouedi.

= ober stamm. « *Inouet o vrouedi* » (E skeud... p. 65).

56. Broust.

« Digor e veze ar halonou ha *broust ar bôtred war ar boued* » (E keud... p. 151). Ar hontrol euz figuz, mad peb seurt boued dezo.

57. Buan.

« *Buan awalh am befe rebarbet outañ hag am befe bet keuz avad !* » = Aussi bien... aussi vite... aussi facilement...

58. Bud ! bud !

Da hervel ar yer e Plouarzel (Mab Arzel 1942).

Plijaduruz e vefe kaoud evid peb karter ar gériou a vez implijet evid gervel pas dichoual al loened.

Setu evid ar Vourh-Wenn, hervez F. Falc'hun.

Ar yer : da hervel : bud ! bud ! — da gas kuit : dichou !

Ar hizier : da hervel : bis ! bis ! — da gas huit : dichegas !

Ar moh : da hervel : doc'hig ! doc'hig ! — da gas kuit : Si ! Si ta !

Ar chas : Tyè ! tyè !

59. Buen (pe muenn) gg.

Eur ouenn loened dem-heñvel ouz al logod e Plouarzel (Mab. Arzel 1942).

60. Buzubul (ano-gwan).

« *Mond e buzubul* ». Koll e skiant-vad. (Plouarzel, Mab Arzel 1942). E Gorre-Leon e vez lavaret : *mond e belbi*.

— Vallee a skriv (Feiz ha B. 1942) eo gwelloh ar gér *bizibul* (c'hoari an eteo). — « *Mond e bizibul* » = tomber en enfance hervez Ernault, p. 50 et 51.

61. Bu.

= dre (par) « *Deus bu amañ 'ta !* » (Gorre-Leon).

V. F.

DEIL

da Visant Seite

O, na glaz an delienn dener
Na tener an delienn hlaz
A zispak war ar skourrig nevez
Mistr evel eur galon noaz !

O, na kaer an delienn aour
A zarv dindan an heol gwrezuz
'Vel deliou ar hantolour pardon
Dirag ar Werhez, mamm da Jezuz !

O, na trist an delienn hoeñvet
Diframmet gand ar skarnil du,
Pa vez drebet gand ar preñved
Ha d'an teil taolet dioustu !

O, deliou paour, deliou kaer,
Deliou ledan, deliou munud,
Om-ni oll, ha 'vel dre laer
Et tremenom gand on hunud. (1)

Mès, gand miz Meurz, a-benn ar bloaz
E tispako deliou nevez,
Deliou tener, deliou glaz,
Mistr evel eur galon noaz.

Dreo Koulouarn.

(1) Kunud, stumm liez kunudenn
kunuchenn.
e galleg : gémissements.

Deliou maro

Trugarez Dit, Dreo Koulouarn.

War ar vali, war an hent,
Dindan ar gwéz, da beb poent,
An deliou maro
A goroll garo,
A nij, a réd, a dro
Atao ! atao !

An deliou maro, seh ha kraz
A zav er vann
En-dro d'ar brank ;
A dro
Hag a zistro,
Hag a ruilh war an hent-praz.

An deliou maro, leiz ha glép
A jom spég
Ouz ar skourrou,
Ouz ar boutou...
War gein an dour réd
E neu bepréd
Deliou glép.

An deliou maro
A vreino
E-mesk ar pri.
A flêrio
En-dro d'an ti.

An deliou maro
A vo teil...
Ha beb eil
E vint lonket gand an douar.
Méd diwarno
E savo glazur dispar
A vo magadurez
Ha buez.

Bepréd,
An deliou maro
A vago
Ar Béd.

Jersey, 11-58.

Visant Seite.

keleier

Skol-hañv.

Greet e vo pempved Skol-hañv ar Bleun-Brug, e Brest, e ti Leanezed ar Retred (Kerstears), euz al lun 24 a viz Eost, d'ar zadorn 29. Digeri a raio d'al lun goude kreisteiz, hag echui a raio d'ar zadorn goude, da greisteiz. Evel warlene on devo darre prezegerien a dalvoudegez. Ar re a zo bet en or peder skol-hañv diwza, a oar n'on-eus greet goap ouz or skolidi, ha n'eo bet morse eur holl amzer d'ad da zelaou or-prezegerien.

Digor eo ar skol-ze, dreist oll d'ar vistri-skol, mistri ha mestrezed. Med digemer vad a vo greet ive d'ar re all a deuo. Eur galv a reom d'ar yaouankizou a zo e penn ar kelhiou, ar bagadoù, hag ive ar re a zo e penn an oberou en eskoptiou.

Muioc'h dén, ha krefivoc'h kristenien e vefe ar Vretoned, m'o-defe muioc'h a anaoude gez euz ar pezh a zell outo da genta : herez santel o zadou. Penaoz avad o devo an anaoudegez-se, ma n'eus dén ebed gouest d'he deski dezo. Ar Bleun-Brug, dre e skol hañv a ro deskadurezh war an dachenn-ze, hag ive war draou-hag a zell ouz an amzer vremañ.

OR SKOL-HANV GENTA a zo bet greet e Rosko, da viz Eost 1947 hag a vodas 15 devez. Heuliet eo bet gand 50 bennag a dud, dreist-oll mistri-skol.

E-giz prezegerien on-doa bet eno : an aotrounez Batany, Falc'hun (hirio person Iesneven). L. ar Floe'h, Dujardin, V. ha J. Seite, Colleau, S. ar Go, Y. ar Gow, L. Seite, Stephan, Jacob, Guivarc'h, Breton, Nedelec, Mocaer, Uguen, Jos Doare.

ON EIL SKOL-HANV a zo bet greet e Kastell-Paol euz an 20 d'ar 27 a viz Eost 1956. Heuliet eo bet gand 70 bennag a dud, mistri ha mestrezed. Bez' on-doa eno e-giz prezegerien : an aotrounez Falc'hun (Skol-Veur), Bourdellès, Le Ner, Y. Bihan, D' Breton, Gougay, Grégoire, Uguen, Derian, Riou, V. ha J. Seite, Duigou, P. Le Flem, J.-M. Guilhaud, Merdy, Tricoire, Jos Doare, hag an ao. 'n Eskob Fave.

ON TREDE SKOL-HANV a zo bet el Likès, Kemper, euz an 2 d'ar 6 a viz Gwen-golo 1957. Heuliet eo bet gand 105 a dud, mistri ha mestrezed-skol, dreist-oll. Bez' on-doa eno e-giz prezegerien : an aotrounez Falc'hun, V. Seite, Le Bail, Riou, Danielou, Tricoire, Duigou, R. ar Moug, B. de Parades, Brazidec, Dujardin, L'Helgoualc'h, J.-M. Guilhaud, Gougay, Jos Doare, an ao. 'n Eskob Fave hag an ao. 'n Eskob Fauvel.

OR PEVARE SKOL-HANV a zo bet greet warlene, e Santez-Anna-Wened, euz ar 25 d'an 31 a viz Eost. Heuliet eo bet gand 120 a dud, mistri ha mestrezed dreist-oll. Evid ar wech kenta eo niverusoc'h ar merhed, leanezed koulz lavared oll, an darn vuia anezo euz urz Kermaria.

Setu amañ ar prezegerien a gomzas e Santez-Anna : an aotrounez Falc'hun, Baudic, Seite, Riou, Danielou, Bourdellès, Brazidec, Rollando, Mahuas, Gallic, Thomas-Lacroix, J.-M. Guilhaud, Lohier, Henri Queffelec, Jos Doare, Michel, Tricoire, Mevellec, Jaffre, Le Bail, Le Braz, ha Biel Eliez.

Diêz e ve lavared pehini euz ar peder skol-hañv-se eo bet ar plijusa. Oll int bet talvouduz braz, ha kenteliuz kenañ.

MAD E VO GOUZOD ROLL AR PREZEKENNOU, bet greet e-doug or skoliou-hañv tremenet. Setu i amañ :

1. Cours de littérature bretonne (Batany), 10 conférences).
2. Le Barzaz Breiz (Batany).
3. Culture bretonne, moyen d'apostolat (Falc'hun, Lesneven).
4. Le Gonidec (D' Dujardin).
5. Lan Inisan, écrivain breton (Job Seite).
6. M. Perrot et son œuvre (Colleau).
7. Le théâtre breton (S. ar Go).
8. Le dessin celtique (L. Seite).
9. La musique bretonne (L. Stephan).
11. L'action bretonne du Couvent de Roscoff (P. Eugène).
12. Les Johnys de Roscoff (Guivarc'h).

13. Bretagne et marine française (J.-M. Breton).
14. Curiosités linguistiques bretonnes (P.-J. Nédélec).
15. Les Celtes d'Outre-Manche (P. Mocaer).
16. Breton et Gallois (F. Uguen).
17. Voyage en Irlande (V. Seite).
18. Le culte des morts chez les Bretons (Y. ar Gow) e brezoneg.
19. L'art breton (Jos Le Doare).
20. Bretons émigrés (Ch. Mevellec).
21. La broderie bretonne (Le Minor).
22. A l'écoute de nos Saints (Bourdellès).
23. Histoire de Bretagne (Bourdellès), 6 conférences.
24. Problèmes se rapportant à l'enseignement du breton (Falc'hun, Seite, Riou).
25. Bombarde et biniou (Le Ner).
26. L'Eglise face aux problèmes culturels (Y. Bihan).
27. Culture bretonne, ouverture sur le monde (Mgr Favé).
28. Bibliothèque bretonne (D' Lebreton).
29. Chant grégorien et Langue bretonne (P. Laurent-Gougay).
30. La Bretagne monastique (P. Grégoire).
31. La Bretagne missionnaire (P. Grégoire).
32. Ecrivains léonards (J. Seite).
33. Ecrivains cornouaillais (Danielou).
34. Langue bretonne et langues celtiques (F. Uguen).
35. La chanson populaire (Derian).
36. Ecrivains trégorois (Bourdellès).
37. Problèmes de minorités linguistiques (Riou).
38. La Bretagne face aux problèmes d'aujourd'hui (Duigou).
39. Les grands auteurs de la musique bretonne (Paul Le Flem).
40. La danse dans la vie sociale en Basse-Bretagne (J.-M. Guilhaud).
41. Initiation à l'art dramatique à partir du folklore breton (G. Le Merdy).
42. La langue bretonne vue par un non-Breton (D' Tricoire).
43. L'art d'expression bretonne (J. Le Doaré).
44. A l'écoute de St Yves (Falc'hun).
45. En faveur du breton, l'apport de l'Eglise (Mgr Favé).
46. Ce qu'on peut attendre d'un renouveau de la vie bretonne (Duigou).
47. Jakez Riou et son œuvre (R. Le Moign).
48. Valeur éducative de nos richesses touristiques (B. de Parades).
49. Les vicissitudes de la langue bretonne (D' Dujardin).
50. Ar Roh-Toull (J. Cormerais).
51. La Bretagne dans la préhistoire (L'Helgoualc'h).
52. Cultures ethniques et culture universelle (J.-M. Guilhaud).
53. Rythmique bretonne et cantiques populaires (P. Laurent-Gougay).
54. La carte linguistique de la Bretagne (Falc'hun).
55. A l'écoute de Ste Anne et de Nicolazic (Falc'hun).
56. Etude de textes bretons (Mahuas, Gallic, Danielou).
57. Richesse de notre culture bretonne (chan. Baudic).
58. Ecrivains du pays de Vannes (Brazidec).
59. Loelz Herrieu et son œuvre (Brazidec).
60. La côte Sud de Bretagne, à l'Aurore de l'Histoire (Rollando).
61. Galloc'h et son œuvre (Le Braz).
62. Fontaines sacrées (Thomas-Lacroix).
63. Le problème du livre d'enfants (J.-M. Guilhaud) avec exposition.
64. Une nouvelle méthode de calcul (J.-M. Guilhaud).
65. Les Proverbes bretons dans la vie (Riou).
66. L'œuvre théâtrale de Le Bayon (Lohier).
67. L'Evangile de la pierre (Henri Queffelec).
68. Formation du goût (Jos. Le Doaré).
69. « Lan embanner al ludu », récit de J. Riou (Falc'hun).
70. Jansénisme au Pays de Vannes (Mahuas).
71. Initiation à l'Art (Michel) avec projection.
72. Un précurseur de l'enseignement du breton (Danielou).
73. Cadoudal, chouan breton (Job Jaffre).
74. L'uranium dans le Morbihan (Le Bail).
75. La Bretagne uranifère (Le Bail).
76. Les Bretons de la diaspora (ch. Mevellec).
77. La désertion de nos campagnes bretonnes (Bourdellès).

Emgleo-Breiz (F.C.B.).

Da geñver bodadeg Emgleo-Breiz, e Brest, d'ar henta a viz C'hwevrer, on-eus roet da houzoud an implij greet euz an arhant bet digantañ e-doug ar bloaz-skol 1957-58 :

Bet digand E. B. evid labour skol ar B. B.....	300.000	lur
Dispignet evid prena ar prizioù a zo bet rote e Bleun-Brug Pont-n-Abad, Perwenan, Noal-Pondi ha St-Thegonnec	269.734	
Dispignou a bep seurt	22.225	
Notennoù da baca :		
Moulla kenstrivadegou Bro-Wened	9.560	
Moulla kenstrivadegou K.L.T.	37.600	
Ar mil diweza « Deskom brezoneg ».....	165.000	
Ar pezh a ra en oll	504.119	300.000 lur

Bez' ez eus en or hef eta eun toul a 204.119 lur da stanka.

Evid sikour paca 2.000 kenta « Deskom brezoneg » on-oa bet digant Emgleo-Breiz 600.000 lur.

Ar Skol dre lizer, na Bleun-Brug n'o-deus resevet sikour arhant ebed digand Emgleo-Breiz.

Evid ar bloaz skol 1958-59, ez eo bet divizet, gand bodadenn Vrest, rei deom evid oberou-skol ar Bleun-Brug : 450.000 lur (euz an arhant-se, on-eus dija dispignet 57.707 lur. Ne jom ganeom da reseo eta nemed 392.293 lur, ha pa vo ganeom paet an dle on-eus e chomo en or hef evid gelei mizou ar henstrivadegou a zeu : 392.293 — 204.119 = 188.174 lur.

E-doug ar bloaz skol tremenet, sekretour ar Bleun-Brug e-neus greet wardro 20.000 km. evid mond euz an eil skol d'eben. Ar mizou e-neus bet evid-se (essans hag all) a zo bet goloet gand priz al levrioù gwerzet a-gleiz hag a zehou.

Ouspenn arhant, ez eus bet roet deom gand Emgleo-Breiz eun toullad mad a levrioù brezoneg da rei e-giz prizioù d'or bugale skol.

Devez ar brezoneg.

Devez ar brezoneg a vo greet er bloaz-mañ, moarvad, d'ar 26 a viz Ebrel. N'eo ket deuet c'hoaz ar respont digand ar houarnamant. — Da heul an devez-se e vo Sizun al levrioù brezoneg. Klasket e vo, e-doug ar zizun-se, gand E. B., ober bruderezh, e peb feson, en-dro d'on levrioù brezoneg, hag o gwerza a zor da zor.

Ar skolioù kristen ha devez ar brezoneg.

96 SKOL GRISTEN o-deus bet kestel warlene da geñver devez ar brezoneg, ha kaset da gef Emgleo-Breiz : 407.757 lur. — An oll skolioù-se, nemed PIQU a zo euz eskopti Kemper ha Leon.

Ouspenn, e-doug gouelioù ar Bleun-Brug ez eus bet kestel : St Tegoenneg : 53.000 lur, Pont-n-Abad : 28.000 lur, Noal-Pondi : 16.000 lur, Perwenan : 12.000 lur. Ar pezh a ra en oll evid ar gouelioù : 109.000 lur.

Labour ar Bleun-Brug e skolioù Kerne ha Leon.

Sekretour ar Bleun-Brug, e doug ar bloaz skol 57-58 e-neus roet prezegennoù skeudennet :

e-doug miz Du 1957.....	e 15 skol
— miz Kerzu 1957	e 2 skol
— miz Genver 1958	e 29 skol
— miz C'hwevrer	e 9 skol
— miz Meurzh	e 17 skol
— miz Ebrel	e 15 skol
— miz Mae	e 13 skol
— miz Even	e 7 skol

Ar pezh a ra en oll eur brezegenn a 1 h. 30.... e 107 skol

Greet e-neus bet ouspenn 16 prezegen all er-mêz ar skolioù.

Goude beza ranket paouez, en abeg d'e yehed, e-pad mizioù Here. Du ha Kerzu, e-neus adkroget gand e labour abaoe deizioù kenta miz Geñver ha bet oh ober prezegennoù er skolioù danvez mistri ha mestrezed euz ar « Côtes-du-Nord » ha « Morbihan » 19 prezegen en oll da war-dro 1.420 a baotred pe blahed : Henebont (Juvena frered-Ploermel), Santez-Anna Wened (juv. al leanezed gwenn) ; Kermaria-Locminé (leanezed Kermaria : Juvena, postula, novisia) ; Alre (juv. frered La Salle) ; Sant-Ave (novisia bihan frered La Salle) ; Gwened (skol danvez mestrezed libr) ; Ploermel (frered Lamennais, Juv., post., skolastika) ; Josselin (fr. Ploermel) ; Sant-Brieg (Leanezed gwenn, post. ha novisia) ; Roskoed-Plehedel (Juv. frered Ploermel). E-miz Du ha Kerzu e-noa greet 5 prezegen e Jersey (novisia frered Ploermel).

Skol dre lizer.

E-doug ar bloaz-skol 57-58 ez eus bet 131 o skriva deom da houlenn diganeom paperioù or skol dre lizer pe da brena on levrioù.

52 euz ar re-ze o-deus kroget da heulia ar skol dre lizer ha karget ar 'follenn-goulennata on-eus bet kaset dezo. Setu amañ penaoz e hellont beza rannet hervez o responchoù :

— Merhed : 28 — gwazed : 24.

— Dindan 20 vloaz : 11 — etre 20 ha 30 : 26 — etre 30 ha 50 : 12 — muioch eged 50 : 3.

O chom e Breiz : 18 — Er-mêz euz Breiz : 34.

Ganet e Breiz : 35 — Er-mêz euz Breiz : 17.

Ganet er vro brezoneg : 19 — o houzoud brezoneg : 11.

Micherioù : oh ober skol : 14 — o labourad en eur buro : 11 — studierien : 7 — micherourien : 3 — martoled : 2 — soudard : 2 — kenwerzourien : 3 — ensellour : 1 — assistantez soc. : 1 — tisavour : 1 — medisin : 1 — chimist : 1 — Ptt : 1 — U.N.E.S.C.O. : 2 — heb micher : 2.

Abaoe miz Eost diweza on-eus bet 48 gouenn heulia or skol dre lizer, ha tost d'an hanter o-deus laket o ano da heulia or skol.

E-touez an oll liziri-ze a resevom ez eus kalz hag a dalvezfe ar boan beza embanet.

Devez a vignoniez ar Bleun-Brug a Gwaien.

Ar Bleun-Brug e-neus adtroget gand e zeveziou a vignoniez. An hini kenta e 1959 a zo bet greet e Gwaien d'ar zul 25 a viz Genver, evid kelhiou Bro-Gerne.

Eun toulladig mad a yaouankizou en em gavas eno, endro d'an aotrounez Priol, aluzenner, Philippe, rener, Le Louz hag an D¹¹ Coadou, sekretourien.

An overenn a oe lavaret evito e chapel St-Remond gand an Ao. Bouin euz skolach Pont-e-Kroaz. E-pad an overenn, an Ao. Priol a lavaras d'ar re yaouank al labour a dle beza o hini e diabarz ar helhiou hag ar bagadoù : sikour ar re all da veza gwelloc'h kristenien ha gwelloc'h Bretoned, hada levezek kristen ha breizad en-dro dezo.

Goude an overenn e oe koroll dindan renadur Loeiz Roparz, hag eur préd laouen e skol al leanezed.

E-doug an endervez e oe gweladennet ar « vivier » dindan renadur an Ao. Marzin-Brusq. — Jos an Doare a reas goude eur brezegenn gaer gand « projection » war arzou kaer or Breiz.

Evid echui e oe servichet eur verenn-vihan, war goust ar Bleun-Brug, ha kutuilhet alioù mad an devez dindan renadur G. Pijon. Divizet e oe kemer perz gand ar muia ma vo gelllet a re yaouank euz ar helhiou, e Troveni vraz Lokorn d'an 12 a viz Gouere a zeu.

Levrioù nevez.

Brud he-deus nevez embannet war gont Emgleo Breiz. oberenn gaerra Tanguil Malmarche : Gurvan ar Marheg estranjour. Eun oberenn eo hag a rank beza prenet gand kement Breizad gouest da lenn brezoneg. Bez' e heller goulenn al levr digand Emgleo Breiz, B. P. 17, Brest, Fin.

Eil levr Per Helias, Mojennoù ar Mor skeudennet dispar gand Jos Doare, a zo ive erru er-mêz, embannet gand Emgleo Breiz. Eul levr kaer muioch da rei e priz d'or bugale.

Bodadegou.

Kuzul Bleun-Brug Leon a zo bet en em vodet e Gouesnou d'ar 14 a viz Genver dindan renadur Yann ar Barz o terhel leh ar rener dalhet er gêr gand e yehed. Araog Bleun-Brug Leon, e Plougastel d'an 28 a viz Even, e vo greet Bleun-Brugou skol e Lanniliz hag e Ploueskad da zibab ar re wella da vond da Blougastel.

Lévrig ar henstrivadegou a zo deuet er-mêz. Bez' e heller her goulenn azaleg bre-mañ digand Sekretour ar Bleun-Brug e Kastellin : 20 lur ar pezh evid ar vugale.

Bodadegou.

Bleun-Brug Leon a vo e **Plougastel** d'an **28 a viz Even**.

Bleun-Brug Kerne e **Elliant** d'ar **5 a viz Gouere**.

Bleun-Brug Gwened e **Langonnet** d'an **21 a viz Even**.

Goude or pennad diweza diwarbenn on Tad Santel,

e resevom ar pennad-mañ digand ar Breur Charles Chevalier euz Solesmes : « N'eo ket bet hepkén Yann XXIII e Kemper hag e Landreger. Bet eo ive e Santez-Anna-Wened. E Landreger e kane gand an oll bardonerien : « Nann n'eus ket e Breiz, Nann n'eus ket unan »... e-pad ar brosesion kén e lakee On Tad Abad da c'hoarzin. En eur zistrei euz Santez Anna, e tremenas dre Solesmes el leh m'ah erruas pemp munud araok préd kreisteiz, ha setu an Orher o kemenn din dre ar pellgomzer : Allo ! Allo ! Le Nonce vient d'arriver avec sa suite... N'am boa nemed pemp munud evid aoza dezo o 'fréd, ha setu prez warnon. Goudeze e teuas davedim : « Ahanta karlo, corasio, bravo pour un repas à l'impromptu ! Bravo ! Bravo !... » Setu aze ar Pab. Ar vadelez didroïdell ! Deuet eo amañ deg kwech bennag, bepred ken seder. »

Ar mouller e-neus on laket, en niverenn ziweza, d'ober eur fazi. N'eo ket ar Pab **Yann XXIII** eo a grogas da lakaad Sant Erwan war roll ar Zent, méd' **Yann XXII**.

« Eil sumfonienn » an ao. Paol ar Flemm.

Laouen braz om bet o houzoud eo bet loreed, eur wech muioh, or mignon ha kenlabourer mad an ao. Paol ar Flemm, evid eun oberenn-veur all a zonèrez bet savet gantañ e fin ar bloaz tremenet, ha bet c'hoariet e Besançon d'an 10 a viz Gwengolo 1958. Eun digemer euz ar henta a zo bet greet d'an oberenn-ze, dre oll, ha meulet braz eo bet. Ra gavo amañ ive, an ao. Le Flemm, gwella meuleudi ar Bleun-Brug, evid an enor a ra da Vreiz a-bez dre e labouriou kaer.



AVEL

Bleñchou ar gwez o deus krenet
Dindan alan an avel...

Euz a beléh e teu
An avel

N'ouzoun ket...
Marteze euz an tu-all d'ar bed...

A-wechou e vez flour,
A-wechou a vez yud,
A-wechou e vez tomm,
A-wechou e vez yen,
A-wechou e vez klouar...

Diouz ma veza ar poent
Hag al labour,
E vo deuet mad
Unan pe unan euz an aveliou...

Me gar an avel...
Rag atao e vez gantañ
C'hwez va Bro...

C'hwez douar ha moriou Breiz,
C'hwez ar bezin,
C'hwez an drêzenn,
C'hwez ar foenn,
C'hwez ar bleunioù,
C'hwez ar frouez ao,
C'hwez an eost dare,
C'hwez an deliou o koueza
Da vreina...

Avel !... Avel !...

En da zourradennou,
Gwan pe greñv,
E teu beteg va 'fronellou,
Beteg va diskouarn
Oll c'hweziou
Ha trouzou va Bro !...

Ne 'm-eus ezomm ebed da weled
A-walh eo din klevet
An avel...

An avel uhel,
Gleb ha yén ;

An avel hevred
Sêh, tomm en hañv
Yén er goañv ;

An avel izel
Tomm, mouguz,
Sin hlao gantañ ;



An avel gornog
Leiz, klouar, [Braz !...
War e askell oll sekredou ar Mor-

Pa hrosmol an avel gornog
E plij din mond,
A-vel d'an dour braz,
War an tevenn...

Hag e tigorán frank
Va fronellou,
Va genou,
Da lonka an ezenn-vor
A garg va skevent,
Va horv a-bez,
Euz he nerz,
Euz he buhez,
Da renevezi va hini
A dremen ive, siwaz !
Evel an avel !...

Yann Gorrigan.
(Meurz 1958)

An iliz eo ti an
Aotrou Doue. Ra vo
kaer an ti-se bepred
ha reñket brao al
liorzou endro dezaiñ
evel e *Gwimageg* amañ
war ar skeudenn.



Setu amañ eur mo-
numant kaer hag a
weler nevez 'zo e-
kichenn iliz parrez
Kast. Eun dudi d'al
lagad, dreist-oll en
noz pa vez sklerijen-
net.